


GWERZ CASERIO SANTO

Muntret ar President CARNOT

Distrujet en kear Lyon, ar 16 a viz Eost 1894



Var eun ton anavezet

Silaout Kenvroadis, silaout me ho ped,
Ar verz nevez he c'han lirie da lavared,
Ar verz nevez he c'han da Javared lirie,
Var sujet barnedigues Santo Caserio.

Ha gren dost da guer Vilan, ebarc en Itali,
Eo ganet Caserio he c'halit va c'herdi,
Deus a seiz bugol he voq, Santo ar iaouanka,
Prq he dud holl en karcio er moueus tra.

Kasset he voa bet d'ar skol heag he zaoueez vla,
Evit m'ann dije disket, konta, lenn ha scriva,
Ha goudeze voa laket da veza louloujer,
Ho dud ho devoa goal c'hoant d'arri dezhan micher.

Deud da veza den iaouank, neur lakaz da brezek,
Evel ma vije ive bet eun den ezanmiek,
Devezennou ha lenne hag e voa fall meurbet,
Hogen an traou fall 'hez da genta vo kredet,

Kamaradet eun deveus, hag he zo evel-tan,
Hag ann droze ha fell d'he chienchi holl er bed-man,
Ar puvidik zo dezhe hopred eun ensour,
Ha gouskonde ar puvidik ha ro dezhe sikour.

Ar puvidik ha zikour kement ho deus ezomm,
Evit ann amzeriou iou evel eun amzer domm,
Sikouret e zomp gauthan pa vemp en paourto,
Hag evel-se ha gloomp en karout nos ha de.

D'ar seurt he voa bet tennet evit laza Carnot,
Be huel he voa kavet da veza 'ar ar rod,
He huel he voa savot, red he voa enn disken,
Unan benag ha riuo torri dezhan he benn.

Red he voa en distruga hag e lakad er be,
Ho zontal ha vije bet sionloch bro-c'hall goude,
Nenze c'has Caserio beteg kar vraz Lyon,
Elec'h saillas var Carnot, vel un tigr pe leon.

Tspetya krog enn emihan ha kaset d'ar prizon,
Da he ortoz ma vije bet he gondaouation,
Gonnennet voa digant-han hag en a'eu devoa ket,
Eur c'heuz benag da veza he dorfed kommeted.

Caserio lavaras n'ann devoa keuz abet,
Ann torfed-se voa unan da veza kommeted,
Ann torfed-se voa unan ha vije gred bepred,
Me ne rohan ket ha gas 'vit beza dibennet.

Me ha ielo eb knout son beteg ar guillotin,
Koz ha iaonank er bed man eun devez ho deus fin,

Biskaos n'em heuz bet krenet dirag fale'h ar maro,
Lavarit dezhi donnet d'am c'havet pa garo.

Kement a zo pinvidik holl he gleont mervel,
Un devez en eur gavo an ankou d'ho gervel,
Ar maro en eur gavo d'ha fale'ha annezhe,
Hag ounes a zo unan hag he zo eb true.

Evit unan ha goeio zeio kant en he lec'h,
Hag ann dreze me en lou ha roio deoc'hui bec'h,
Lennit mad ho koutellou evit trec'h hor goug,
Ur veach ma ver maro he rer neuleud ha zroag.

Kalz a destou voa klevet enep Caserio,
Hag ar Lez-varn he deas an kondoaonet d'ar maro,
Var eun deus plassou Lyon, he vezo dibennet,
Hag evel-se a beo d'al lezeu ho dorfed.

He alvocad en deus bet dibennet anezhan,
Evel he gheer d'elan eun den en amzer-mañ,
He alvocad en devoa evit-an mad komzet,
Ha kouskoude al lez-varn en deus-han en barlet

Ho tistrei deus al lez-varu, Santo e lavare,
Ra vevo n'anrehi beteg fin or huc,
Ur veach ma vin maro re all en em gavo,
Red e vo dere'hel enor Caserio Santo.

Breman pa zec bet barnet pedomp holl evit-han,
Evit n'ann devo keuz ho vont deus ar bed-man,
Hag eur vech ma vemp maro aman ne zeuomp ken
En douar koz ha iaonank ebompomp da viraken !

Caserio zo maro he c'houg ha zo troc'hed,
Ar boureo gant he gontel enn deus enn dibennet,
He gorf a zo eun douar ha breman he ene,
Ha zo savet d'ann henvou da gavet eun Doue.

Evel-se tud Breiz-Izell, hirio c'hoas ho pedan,
Koz konkoulos evel iaonank, da bedi evit-han,
Ann hui a zo he dronenn kreiz-bolz ann henvou,
Ma vo dezhan pardonn ar brassa torfedjou.

VISANT COAT.

Propriété de l'Éditeur.

MERCHED LOKENOLE

Var eun ton anavezet.

Merc'hedjou Lokenole, a zo merc'hed a stad (bis)
Ne brizout ket a zausal, nemet gant potret vad (bis)

Merc'hedjou Lokenole, ha ia d'ar baladen,
Diare'han, divouchouer, kef abet var ho ten.

Merc'hedjou Lokenole, ho devezs prometet,
Monet en peleriach, da Sant Ian beniget.

Dre c'hras an Aotrou Doue, da Sant Ian n'int ket ent,
Hag ebars e Ploegastou, ez int bet diskennet.

Ar Person e lavare, d'ar zil en ofern-bred,
Diwallit merc'hed iaonank, gant aon vefec'h tromplet

Diwallit merc'hed iaonank, gant aon vefec'h tromplet
Dre ar c'habiten Lablond hag he vartolodet.

A merc'hed a respontas deus a draon an iliz,
Prezgit Aotrou Person, n'imp a reio hor giz.

Ne voa ket peur lavaret, na mad ar gousperou,
He voa ar merc'hed iaonank, ergaer a Blougastou.

Bars e ty Mari Beron, e zint bet diskennet,
Ho ia dre ma ma voa gant-he fale'hou martolodet.

Ar merc'hedjou a drinke hag a lipe ho beg,
Hag ar voarsel a game, ha game en gallek.

Hag ar voarsel a game, ha game en gallek,
Hag ar merc'hed a c'hoaze dre ma intentent ket.

Nemet eun dorfes vihan, deus a young Carantec,
Houmes voa bet er gouant, ho tiski ar gallek.

Houmes voa bet er gouant, ho tiski ar gallek,
Hag a bede mil mallos, var ar vartolodet.

Ar voarsel a lavare, gader ho daou lagad,
Da vere'bed Lokenole, zroig dont d'ho c'huitad.

Ma vefen nimp intaouien, greg d'emp ne vefomp ket,
Nimp zeio c'hoas eur veach, eur veach d'ho kueleid.

Hag a zigasso deoc'hui, neuze eur chapeled,
Ha gouleorou en arc'hant d'ho kamaradezet.

Merc'hedjou Lokenole, n'eur vela lavare,
Da Lablond ar c'habiten n'imp hor bo keuz dide.

Kenavo dide Lablond, o ia pa m'hout ho vont,
Me garte a greiz kalon, he vijes c'hoas ho tont.

Merc'hedjou Lokenole, a woelo var ar ar c'has,
Da Lablond ar c'habiten, allaz ! partiet he.

Lablond a zo partiet, gant he vartolodet,
A merc'hed Lokenole, ha luannad bepred.

Lablond a zo partiet, hag ead er mos ar vro,
A merc'hed Lokenole, a c'hortoz e zistro.

Mo gred da Lokenole, ne zistrolo biken,
Ker ho devezs ar merc'hed, kavot poan hag anken.

Ker ho devezs ar merc'hed, gada dezhan dourek,
Ne zeio ket da gana, dezho zoniou gallek.

Rag-se-ta merc'hed iaonank a galon me ho ped,
Ankouac'hait Lablond, hag e vartolodet.

Ankouac'hait Lablond, hag e vartolodet,
A bezit ive furoc'h en amzer da zonet.

A bezit ive furoc'h en amzer da zonet,
Evit ma zoc'h bet merc'hed en amzer drementet.

Dastumet gant VISANT COAT.

AR MARSEILLAISE

VAR TON : Allons, enfants de de la patrie, . . .

DEOMP-NI all, bogalez ar van-bro,
Ha rodomp var zu ar victoar !
Savet ez eo banier hor maro,
Vre urrach vramet barbar. (bis)

Allo c'hlec, eru en hor mizao,
O yudal soudardet laloret ;
E' maint dija var hon oadet,
O vuetra groeg, hor bugaligo !

D'an armou, va breudeur ! courach, citoyenet !
Ruyet (bis) ra vo hor bro gand goad an tirantet !

Petra fel d'eur vanden tud udur,
Moullien, roume treitour ?
Pere n'o deus nac urz na muzur,
Pill a carouch eo ho labour. (bis)

Francien, deomp a pebeus outrach !
Erdies hon ol indignite,
Ny eo a gombattor lirie
Da gosa e ercis an esclavach !

D'an armou, va breudeur ! courach, citoyenet !
Ruyet (bis) ra vo hor bro gand goad an tirantet !

A ny a berrmette forbanet
En hau ty d'ober al lezen ?
Peres ! ou arme a dud gopret

Hon treche-ri dilemourien ? (bis)
O Doue just ! nac eur seurt armou
A rae deomp plega hor pen,
Hac hon discar var an dachen,
Ha mestroui neuden hon devo !

D'an armou, va breudeur ! courach, citoyenet !
Ruyet (bis) ra vo hor bro gand goad an tirantet !

Pa gombattot, e gair Francizien
Esperit an oll vietimou ;
Foret e zint dre m' dretourien
Da guemer pour en o c'himou. (bis)
Mes grit santout potez an offanc
Da gonsortet fall a Bouille,
D'an oll digret-se didrou
Pere a zifrez calon ar Franc

D'an armou, va breudeur ! courach, citoyenet !
Ruyet (bis) ra vo hor bro gand goad an tirantet !

Crenit, tirantet ha perdidet, (bis)
Confusion ha mez ar vro ;
Crenit, ho tessinou milliget
A gousto deoc'h ur ar maro.
Ni so oll breudeur o combatti ;
Mar maup hon brezelquerien,

Ar Franc a royo c'hoas mibien
Ha prest evello d'oc'h ataq
D'an armou, va breudeur ! courach, citoyenet !
Ruyet (bis) ra vo hor bro gand goad an tirantet

Ebars er renq goude hor breudeur
Ni a guemero an armou ;
Hac en hor goad ar memes ardeur
Ni a gurino o aevrou ; (bis)
O exempl a zui d'ho allia
Da affronti heumar maro,
Ma m'omp an honor var un dro
D'o vanji p'otranant d'o heullia !
D'an armou, va breudeur ! courach, citoyenet !
Ruyet (bis) ra vo hor bro gand goad an tirantet

Carantec sac' eris ho vambro-ni,
Candu hon divrac'h d'ar venjanc,
O liberte ! hor guir ez om-ni,
Deus da gombatti gant ar Franc. (bis)
Gra ma tougomp lore ar victoar,
Ha ma refoomp dre ho brezel
D'ac'h ennemet, o vervel,
Guelet da triomphi hag hon oll gloar.
D'an armou, va breudeur ! courach, citoyenet !
Ruyet (bis) ra vo horbro gand goad an tirantet !